


AN

OVERSEEM



LEVR AR BELED
DGH AN ADTER

Supplément à "EGLISE DE VANNES - 1979"

Trésadenn ar golo zo bet saüet ged
René LE HONZEC, arzour, LANDEVANT.

AN OVERENN

An ORDO MISSÆ nevé

29 Préfas

4 Pedenn-veur

1979

IMPRIMATUR

aveid en ORDO MISSAE neùe
reit ged en Aotrou Eskob KERVEADOU
Sant BRIEG 1969
ha ged en Aotrou Eskob BOUSSARD
GWENED 1969

**E anù en Tad, hag er Mab, hag er Spered Santél.
Amen.**

ER SALUD D'ER BOBL

- Revo grès on Salvér Jézuz Krist,
karanté Doué en Tad,
hag unanieh er Spered Glan genoh-hui oll berped.
R/ Ha ged ho spered
- En Aotrou Doué revo genoh.
R/ Ha ged ho spered
- Grès ha peah deoh-hui, me breudér,
a berh Doué on Tad hag on Salvér Jézuz Krist
R/ Meulam en Aotrou Doué.

LID ER BENIJENN

- Me breudér, anaùam on péhedeu dirag Doué ha gou-
lennam é bardon, eid ma veem é stad de lidein en
overenn santél.
- Me anaù dirag Doué oll-gelloudeg ha diragzoh, me
breudér, em-es péhet braz dré chonj, dré gomz,
dré obér ha dré vank a obér.
Dré me goall (faat), dré me goall, dré me brasan goall.
ged en Eled ha ged en oll Sent,
ha genoh-hui, me breudér, pedein Doué aveidon.
Rag-sé é houlennan
ged en Intron Vari berped gwerhiéz,

ER BELEG

Plijet ged Doué oll-gelloudeg kemér trué dohem,
pardonein deom on péhedeu
hag on has d'er vuhé peurbaduz.

R/ Amen

- Ho-pet trué dohem, Aotrou Doué,
R/ Rak péhet on-es éneb deoh
Diskoeit deom, Aotrou, ho madeleh,
R/ Ha reit deom ho salvedigeh

ER BELEG

Plijet ged Doué oll-gelloudeg kemér trué dohem,
pardonein deom on péhedeu
hag on has d'er vuhé peurbaduz.

R/ Amen.

- Hui hag e zisamm er haloneu goasket d'er péhed,
Salvér Jézuz, ho-pet trué.
R/ Salvér Jézuz, ho-pet trué !
Hui hag e zo deit de halùein er béherion,
R/ Salvér Jézuz, ho-pet trué !
Hui azéet é gloér en Tad eid goulenn é bardon
/aveidom,
R/ Salvér Jézuz, ho-pet trué !

ER BELEG

Plijet ged Doué oll-gelloudeg kemér trué dohem,
pardonein deom on péhedeu
hag on has d'er vuhé peurbaduz.

R/ Amen

KYRIE

Aotrou Doué, ho-pet trué. (diù wéh)
Aotrou Doué, ho-pet trué. (diù wéh)
Aotrou Doué, ho-pet trué. (diù wéh)

GLOER DE ZOUE

Gloér de Zoué é lein en Néan,
ha peah ar en douar d'en dud karet geton.

- Ho meulein e hram. Ho trugèrékad e hram. Ho adorein
/e hram.

Inour deoh e ganam,
ha mil bennoh aveid ho kloér heb par.

- Aotrou Doué, Roué en Néan,
Doué en Tad oll-gelloudeg.

Aotrou, Mab unganet, Salvér Jézuz.

- Aotrou ha Doué, Oén Doué, Mab en Tad.
Hui hag e lam péhed er bed, ho-pet trué dohem.
- Hui hag e lam péhed er bed, dégeméret on pédenn.
Hui hag e zo azéet én tu déheü d'en Tad, ho-pet trué
/dohem.

- Rag Hui hembkén e zo santél.
Hui hembkén e zo Mestr.

- Hui hembkén e zo ihuél-meurbed, Salvér Jézuz,
ged er Spered Santél é gloér Doué en Tad. Amen.

PEDENN

Pédam

... Dré Jézuz Krist, ho Mab, on Salvér hag on Doué,
e viù genoh ha ged er Spered Glan,
a oll viskoah de viruikén.

... Hui hag e viù ged en Tad ha ged er Spered Glan,
a oll viskoah de viruikén.

... Ean hag e viù genoh ha ged er Spered Glan,
a oll viskoah de viruikén.

R/ Amen

Lid Er Gomz

KENTEL

tennet a ... lihér Sant Paol de gristenion...

(Goudé er gentél,
mar karér)

Chetu komzeu Doué
R/ Trugéré de Zoué

AVIEL

Eraog :

Glanneit me halon ha men géneu (divéz), Doué
oll-gelloudeg, eid ma hellein embann él men dé deliet
ho Aviél santél.

PENNAD ag en Aviél santél revé Sant Maheu, Lukaz...
R/ Gloér deoh-hui, Salvér Jézuz.

Arlerh :

CHETU komzeu Jézuz Krist
R/ Mélasion deoh Salvér Jézuz !

A vouéh izél :

Dré gomzeu en Aviél, revo glanneit on haloneu.

OVERENN GED UN DIAGON :

En diagon :

Mar plij genoh, Tad, reit dein ho pennoh.

En overennour :

Revo en Aotrou Doué
én ho kalon hag én ho kéneu (ar ho tivéz),
eid ma helleët embann èl men dé deliet
é Aviél santél,
é anù en Tad, hag er Mab hag er Spered Santél.

R/ Amen.

— 4 —

ME GRED E DOUE

Me gred én un Doué hebkén,
en Tad Oll-gelloudeg, krouéour en néan hag en douar,
oll en traou e wélér hag er ré ne wélér ket.

— Hag én ur Mestr hebkén, Jezuz Krist, Mab unganet de
/Zoué.

Gânet ag en Tad a oll viskoah :

Doué gânet a Zoué, sklerdér gânet ag er sklerdér,
gwir Doué gânet ag er gwir Doué ;

— gânet, ha nen dé ket groeit, ken-natur ged en Tad ;
ha drézon éma bet groeit pèb tra.

Aveidom-ni, en dud, hag aveid on salvedigeh,
éma diskennet ag en néan,

— ha korv en-des keméret,
dré nerh er Spered Santél, ag er Werhiéz Vari,
ha deit é de voud dén.

Staget doh er groéz aveidom édan Pons Pilat,
anduret en-des ha lakeit é bet én ur bé.

— D'en driven dé éma saùet a varù de viù, revé er
/Skritur Santél.

Oeit é d'en néan hag azéet én tu deheu d'en Tad.

Ha doned e hrei hoah, lan a hloér,
de varnein er ré viù hag er ré varù.

Ha ne vo fin erbed d'é rouanteleh.

— Me gred ér Spered Santél, e zo Doué hag e ra buhé,
e za ag en Tad hag er Mab.

El en Tad hag er Mab éma adoret hag inouret ;
komzet en-des dré er broféted.

— Me gred én Iliz, e zo unan, santél, katolik hag
/apostoleg.

Anaouid e hran ur vadéent hebkén aveid pardon er
/péhedeu.

— Ha gortoz e hran er ré varù de seùel de viù,
ha buhé er bed de zoned. Amen.

PEBENN ER GRISTENION

— 5 —

Lid Er Proveu

KENNIG ER BARA

Reveët benniget, Aotrou Doué, Krouéour er bed abéh,
rag én ho larganté é ret deom er bara-man e gennigam
/deoh,

fréh en douar ha fréh labour mabdén ;
doned e hrei de voud aveidom bara er vuhé.

ar don "REVO MELET"
mar karér,

Bennoh de Zoué ha mélasion,
A oll viskoah de viruikén !

A vouéh izél :

Dré vistér en deur-man lakeit ér gwin,
reveem lodeg é natur douéel
en Hani en-des prezet kemér on natur dénel.

KENNIG ER GWIN

Reveët benniget, Aotrou Doué, Krouéour er bed abéh,
rag én ho larganté é ret deom er gwin-man e
/gennigam deoh,

fréh er winienn ha fréh labour mabdén ;
doned e hrei de voud aveidom ur vammenn a vuhé.

ar don "REVO MELET"
mar karér,

Bennoh de Zoué ha mélasion,
A oll viskoah de viruikén !

A vouéh izél :

Ged ur galon izél ha glaharet
é houlennam genoh, Aotrou Doué, on dégemér.
Lakeit on sakrifis de seùel betagzoh hiziù,
ha groeit ma plijo deoh.

LAVABO

Golhet-mé, o men Doué, a beb kousiadur
ha glânneit-mé a me féhedeu.

ORATE FRATRES

Pédam, mem breudér, ma plijo de Zoué en Tad
dégemér er sakrifis e gennigam oll ar un dro.

R/ Aveid gloér é anù santél
ha salvedigeh er bed abéh.

PEDENN

... Dré Jézuz Krist, on Salvér.

R/ Amen.

PREFASEU :		P. 9 - 34
ER PEDENNEU MEUR	I	P. 35
	II	P. 41
	III	P. 45
	IV	P. 50

Préfaseu Er Blé

Préfas sulieg I	P. 9
Préfas sulieg II	P. 10
Préfas pampdieg I	P. 11
Préfas pampdieg II	P. 11
Préfas en Avent I	P. 12
Préfas en Avent II	P. 13
Préfas en Nédeleg	P. 14
Préfas en Epifani	P. 15
Préfas er Hoareiz - pampdieg	P. 16
Préfas er Hoareiz - sulieg	P. 17
Préfas er Groéz	P. 17
Préfas Sakremant en Aotér	P. 18
Préfas Pask	P. 19
Préfas en Asansion	P. 20
Préfas er Spered Santél	P. 21
Préfas en Drinded Santél	P. 22
Préfas Kalon Sakret Jézuz	P. 23
Préfas er Hrist Roué	P. 24
Préfas Sant Jojob	P. 25
Préfas er Werhiéz Vari	P. 26
Préfas Santéz Anna	P. 28
Préfas Sant Yehann er Badéour	P. 29
Préfas Sant Padern, diazéour Iliz Gwéned	P. 30
Préfas en Oll Sent	P. 31
Préfas gloestr en Ilizieu	P. 32
Préfas en Apostoled	P. 33
Préfas er ré Varù	P. 34

PREFAS SULIEG I

En Aotrou Doué revo genoh
 R/ Ha ged ho spered
 Saùam on haloneu
 R/ Saùet int trema Doué
 Meulam Doué on Aotrou
 R/ Just ha santél é

E GWIRIONE, Tad Santél, Doué oll-gelloudeg ha
 /peurbaduz,

un dra just ha deliet é ho trugèrékad
 é peb léh hag é peb amzér,
 dré Jézuz Krist on Salvér.

Ean hag en-des dré vistér é Bask
 kaset de benn un obér burhuduz
 doh on tennein a sklavaj er péhed hag er marù,
 eid on galüein de voud lodeg én é hloér hag én é vuhé.
 Ha breman é hellam dougein anüeu dispar :
 pobl dasprénet, pobl dibabet,
 broiad santél a rouané hag a véléion ;
 hag é vrudam é peb léh obéreu kaer ho kelloud,
 dré ma hues on lakeit de dremén
 ag en tioélded d'ho sklerdér.

RAG-SE, unanet ged en Eled hag en Arhéled
 ha ged oll Speredeu gelloudeg en Néan,
 é kânam mélasion d'ho kloér én ul lared de virükén :

Santél, Santél, Santél en Aotrou Doué, Mestr er bed.
Lan é ged ho kloér en néanv hag en douar.

Hosanna é lein en Néanv !

Revo benniget en Hani e za é anù en Aotrou Doué.
Hosanna é lein en Néanv !

PREFAS SULIEG II

En Aotrou Doué revo genoh

R/ Ha ged ho spered

Saùam on haloneu

R/ Saùet int trema Doué

Meulam Doué on Aotrou

R/ Just ha santél é

E GWIRIONE, Tad Santél, Doué oll-gelloudeg ha

/peurbaduz

un dra just ha deliet é ho trugèrékad
é peb léh hag é peb amzér,
dré Jézuz Krist on Salvér.

Rag én é drué doh mab dén kouéhet ér péhed,
Ean en-des prezet ganein ag er Werhiéz Vari.

On tennet en-des ag er marù én ur andur é Basion,
hag én ur seùel a varù de viù,
en-des reit deom er vuhé e bado de virùikén.

RAG-SE, unanet ged en Eled hag en Arhéled
ha ged oll Speredeu gelloudeg en Néan,
é kanam mélasion d'ho kloér én ul lared de viruikén :

SANTEL, SANTEL, SANTEL...

PREFAS PAMDIÉG I

E GWIRIONE, Tad Santél, Doué oll-gelloudeg ha

/peurbaduz,

un dra just ha deliet é ho trugèrékad
é peb léh hag é peb amzér,
dré Jézuz Krist on Salvér.

Rag énon en-des plijet deoh unânein peb tra,
ha rein deom boud lodeg é pinùidigeh (landed) é vuhé.
Ean hag e zo gwir Doué dré natur
zo dichennet d'en izéllan,
hag én ur skuill é hoèd ar er groéz
en-des reit d'er bed ho peah hag ho pardon.

Ha breman, saùet dreist en oll dreu krouéet,
éma eid er ré e sent doh é vouéh
salvedigeh ha buhé peurbaduz.

RAG-SE, unânet ged en Eled en Arhéled
ha ged oll Speredeu gelloudeg en Néan,
é kânam mélasion d'ho kloér én ul lared de virùikén :

SANTEL, SANTEL, SANTEL...

PREFAS PAMDIÉG II

E GWIRIONE, Tad Santél, Doué oll-gelloudeg ha

/peurbaduz,

un dra just ha deliet é ho trugèrékad
é peb léh hag é peb amzér,

Hui hag e hues krouéet mabdén dré vadeleh,
ne hues ket éan dilézet
pe oé kondânet dré justis,
med én ho karanté e hues en dasprénet
dré Jézuz Krist on Salvér.

DREZON, Tad Santél, éh oh meulet ged en Eled,
inouret ged en Arhéled,
adoret ged oll Speredeu gelloudeg en Néan
e stoui diragzoh ér vrasan leùiné.
Geté enta lesket-ni de seùel on bouéhieu
aveid ho pennigein ha kanein d'ho kloér peb mélasion
Santel, Santel, Santel...

PREFAS EN AVENT I

En Aotrou Doué revo genoh

R/ Ha ged ho spered

Saùam on haloneu

R/ Saùet int trema Doué

Meulam Doué on Aotrou

R/ Just ha santél é

E GWIRIONE, Tad Santél, Doué oll-gelloudeg ha

/peurbaduz,

un dra just ha deliet é ho trugèrékad
é peb léh hag é peb amzér,
dré Jézuz Krist on Salvér.

Ur wéh ketan éma deit,

én ur gemér on natur distér,
eid kas de benn er volanté madelehuz
e hues bet a oll viskoah :
digor deom hent er salvedigeh.

Un eil wéh é tei éndro ged gelloud ha gloér
aveid rein deom, é splann dér er baradouiz,
er madeu e hortam breman én ur veillal ér Fé.

RAG-SE, unânet ged en Eled hag en Arhéled
ha ged oll Speredeu gelloudeg en Néân,
é Kânam mélasion d'ho kloér én ul lared de virùikén :

SANTEL, SANTEL, SANTEL...

PREFAS EN AVENT II

E GWIRIONE, Tad Santél, Doué oll-gelloudeg ha

/peurbaduz,

un dra just ha deliet é ho trugèrékad
é peb léh hag é peb amzér,
dré Jézuz Krist on Salvér.

Ean é er Mèsi

en-des er Broféted kânet a bell amzér,
er Mab en-des er Werhiéz gorteit ged karanté dispar,
er Salvér en-des Yehann er Badéour predéget é
/zonedigeh
ha diskoeit d'en dud pe oé arriù én o mesk.

Ean é en hani on laka d'en em droein ged leùiné
trema mistér é Hânedigeh,
eid ma veem kavet geton, pe zigouého,
é veillal ér bedenn hag é kânein mélasion.

RAG-SE, unânet ged en Eled hag en Arhéled
ha ged oll Speredeu gelloudeg en Néân,
é Kânam mélasion d'ho kloér én ul lared de virùikén :

SANTEL, SANTEL, SANTEL...

PREFAS EN NEDELEG

E GWIRIONE, Tad Santél, Doué oll-gelloudeg ha
/peurbaduz,

un dra just ha deliet é ho trugèrékad
é peb léh hag é peb amzér,

RAG, dré vistér ho Mab deit de voud dén,
e hues lakeit sklerdér ho kloér
de lugernein dirag on speredu ged ur splanddér neué.

Ha breman, pe anaùam Doué édan un natur-dén e wélam,
éh om douget drézon de garein er péh ne wélam ket.

RAG-SE, unânet ged en Eled hag en Arhéled
ha ged oll Speredu gelloudeg en Néân,
é Kânam mélasion d'ho kloér én ul lared de virùikén :

SANTEL, SANTEL, SANTEL...

UNANET GED EN ILIZ...

Unânet ged en Iliz abéh é lidam en nozeh (dé) santél
ma oé gânet ag en Intron Varia berped gwerhiéz
ur Salvér d'er bed-man,
hag é fall deom inourein de getan
er Werhiéz Vari, Mamm de Jézuz Krist...

PREFAS EN EPIFANI

En Aotrou Doué revo genoh
R/ Ha ged ho spered

Saùam on haloneu
R/ Saùet int trema Doué

Meulam Doué on Aotrou
R/ Just ha santél é

E GWIRIONE, Tad Santél, Doué oll-gelloudeg ha
/peurbaduz,

un dra just ha deliet é ho trugèrékad
é peb léh hag é peb amzér,

Rag ho Mab ungânet,
doh en em ziskoein én on natur marùél,
en-des reit deom buhé neué dré sked é sklérjenn
/divarùèl.

RAG-SE, unânet ged en Eled hag en Arhéled
ha ged oll Speredu gelloudeg en Néân,
é Kânam mélasion d'ho kloér én ul lared de virùikén :

SANTEL, SANTEL, SANTEL...

UNANET GED EN ILIZ

UNANET ged en Iliz abéh é lidam hiziù en dé santél
m'en-des ho Mab ungânet,
par deoh én ho kloér peurbaduz,
en em ziskoeit deom én ur horv haval doh on hani,
hag é fall deom inourein de getan
er Werhiéz Vari, Mamm de Jézuz Krist...

PREFAS ER HOAREIZ - pamdieg

En Aotrou Doué révo genoh

R/ Ha ged ho spered

Saùam on haloneu

R/ Saùet int trema Doué

Meulam Doué on Aotrou

R/ Just ha santél é

E GWIRIONE, Tad Santél, Doué oll-gelloudeg ha
/peurbaduz,

un dra just ha deliet é ho trugèrékad
é peb léh hag é peb amzér,

RAG dré er benijenn é vouget on goall décheu,
é saùet tremazoh on speredeu,
é ret deom nerh-kalon ha gounid peurbaduz,
dré Jézuz Krist on Salvér.

DREZON, Tad Santél, éh oh meulet ged en Eled,
inouret ged en Arhéled,
adoret ged oll Speredeu gelloudeg en Néan
e stoui dirag zoh ér vrasan leùiné.
Geté enta lesket ni de seùel on bouéhieu
aveid ho pennigein ha kênein d'ho kloér peb mélasion

SANTEL, SANTEL, SANTEL...

PREFAS ER HOAREIZ - sulieg

E GWIRIONE, Tad Santél, Doué oll-gelloudeg ha
/peurbaduz,

un dra just ha deliet é ho trugèrékad
é peb léh hag é peb amzér,
dré Jézuz Krist on Salvér.

RAG beb blé é ret d'ho tud fidél
er hrès de renevéein o haloneu
aveid gortoz gouilieu Pask ér leùiné.

Elsé, beam gredusoh ér bedenn hag én obéreu a garanté,
ha dré gemér perh ér mistérieu en-des reit deom buhé
/neùé,

reveem lânet muioh-mui ged er hrès santél
e hra deom boud ho pugalé.

RAG-SE, unânet ged en Eled hag en Arhéled
ha ged oll Speredeu gelloudeg en Néân,
é Kânam mélasion d'ho kloér én ul lared de virùikén :

SANTEL, SANTEL, SANTEL...

PREFAS ER GROEZ

E GWIRIONE, Tad Santél, Doué oll-gelloudeg ha
/peurbaduz,

un dra just ha deliet é ho trugèrékad
é peb léh hag é peb amzér,

HUI hag e hues staget doh koed er Groéz
salvedigeh en oll dud,
eid ma saùehé éndro er vuhé
ag er péh e oé bet kaoz d'er marù,
hag, èl m'en-doé en Droug-Spered feahet mabdén dré
/ur wéenn,

élsen eùé, dré wéenn er Halvar,
éma bet feahet Satan ged Jézuz Krist on Salvér.

DREZON...

DREZON, Tad Santél, éh oh meulet ged en Eled,
inouret ged en Arhéled,
adoret ged oll Speredeu gelloudeg en Néan
e stoui diragzoh ér vrasan leüiné.
Geté enta lesket-ni de seüel on bouéhieu
aveid ho pennigein ha kênein d'ho kloér peb mélasion

SANTEL, SANTEL, SANTEL...

PREFAS SAKREMANT EN AOTER

En Aotrou Doué revo genoh

R/ Ha ged ho spered

Saüam on haloneu

R/ Saüet int trema Doué

Meulam Doué on Aotrou

R/ Just ha santél é

E GWIRIONE, Tad Santél, Doué oll-gelloudeg ha
/peurbaduz,

un dra just ha deliet é ho trugèrékad
é peb léh hag é peb amzér,
dré Jézuz Krist on Salvér.

EAN é er béleg gwirion ha peurbaduz
en-des en em reit deoh aveid on salvedigeh,
hag en-des disket d'é Apostoled
penaoz kenderhel de gennig é Sakrifis.

Ha ni, revé m'en-des gourhemennet,
ni e gennig deoh é brovadenn én ur zerhel chonj
/anehon,
hag é pred santél en aotér ni e zèbr bara er vuhé
aveid disklériein mistér é varù betag m'é tei éndro.

RAG-SE, unânet ged en Eled hag en Arhéled
ha ged oll Speredeu gelloudeg en Néân,
é Kânam mélasion d'ho kloér én ul lared de virüikén :

SANTEL, SANTEL, SANTEL...

PREFAS PASK

E GWIRIONE, Tad Santél, Doué oll-gelloudeg ha
/peurbaduz,

un dra just ha deliet é ho trugèrékad
é peb léh hag é peb amzér.

MED dreistoll ha ged brasoh mélasion
en dé (noz, amzér) santél
m'en dé bet Jézuz Krist, on Oén Pask,
lakeit d'er marù aveidom.

Rag Ean é en Oén gwirion en-des lamet péhed er bed,
en-des é verüel distrujet on marù,
hag én ur seüel ag er bé
reit dem endro er Vuhé.

RAG-SE, unânet ged en Eled hag en Arhéled
hag ged oll Speredeu gelloudeg en Néan,
é kânam mélasion d'ho kloér én ul lared de virüikén :

SANTEL, SANTEL, SANTEL...

UNANET GED EN ILIZ...

UNANET ged en Iliz abéh é lidam en nozeh (dé) santél
m'en des on Salvér Jézuz Krist saüet a varù de viù,
hag é fall deom inourein de getan
er Werhiéz Vari, Mamm de Jézuz Krist...

CHETU ENTA er brovadenn e gennigam deoh,
ni, ho péliéon, ha genem ho tud fidél :
ha hiziù hé hennigam dreistoll aveid er ré e hues reit
/dehé,
dré en deur hag er Spered Santél,
buhé neüé ged pardon o féhedeu ;
dégeméret-hi...

PREFAS EN ASANSION

En Aotrou Doué revo genoh

R/ Ha ged ho spered

Saùam on haloneu

R/ Saùet int trema Doué

Meulam Doué on Aotrou

R/ Just ha santél é

E GWIRIONE, Tad Santél, Doué oll-gelloudeg ha

/peurbaduz,

un dra just ha deliet é ho trugèrékad
é peb léh hag é peb amzér,
dré Jézuz Krist on Salvér.

RAG, goudé boud saùet ag er bé,

Ean en-des en em ziskoeit biù d'é oll zisiplé,
ha dirag o deulagad éma oeit d'en Néan,
eid on lakad de voud lodeg én é natur a Zoué.

RAG-SE, unânet ged en Arhéled

ha ged oll Speredeu gelloudeg en Néan,
é kânam mélasion d'ho kloér én ul lared de virùikén :

SANTEL, SANTEL, SANTEL...

UNANET GED EN ILIZ...

UNANET ged en Iliz abéh, é lidam hiziù en dé santél

m'en-des ho Mab ungânet lakeit de azé
én tu déheu deoh én ho kloér
on natur distér en-doé keméret.

Hag é fall deom inouerein de getan
er Werhiéz Vari, Mamm de Jézuz Krist...

PREFAS ER SPERED SANTEL

E GWIRIONE, Tad Santél, Doué oll-gelloudeg ha

/peurbaduz,

un dra just ha deliet é ho trugèrékad
é peb léh hag é peb amzér,
dré Jézuz Krist on Salvér.

RAG, goudé boud saùet de lein en Néan,

hag azéet én tu déheu deoh,
Ean en-des hiziù, èl m'en-doé grateit,
skuillet er Spered Santél ar en dud,
e hues keméret aveid ho pugalé.

CHETU PERAG é trid (verù) er bed abéh

ged er vrasan leùiné,
hag oll speredeu gelloudeg en Néanv
e gan mélasion d'ho kloér
én ul lared de virùikén :

SANTEL, SANTEL, SANTEL...

UNANET ged en Iliz abéh é lidam hiziù dé santél er

/Pantekost

m'en-des er Spered Santél
en em ziskoeit d'en Apostoled
é kiz teadeu tan dinivér,
hag é fall deom inouerein de getan
er Werhiéz Vari, Mamm de Jézuz Krist...

CHETU ENTA er brovadenn e gennigam deoh,

ni, ho péléion, ha genem ho tud fidél :
ha hiziù hé henigam dreistoll
aveid er ré e hues reit dehé,
dré en deur hag er Spered Santél,
buhé neùé ged pardon o féhedeu ;
dégeméret-hi...

PREFAS EN DRINDED SANTEL

En Aotrou Doué revo genoh

R/ Ha ged ho spered

Saùam on haloneu

R/ Saùet int trema Doué

Meulam Doué on Aotrou

R/ Just ha santél é

E GWIRIONE, Tad Santél, Doué oll-gelloudeg ha

/peurbaduz

un dra just ha deliet é ho trugèrékad
é peb léh hag é peb amzér.

RAG, ged ho Mab ungânet hag er Spered Santél,
nen doh meid un Doué hebken :

tri Person én un natur a Zoué.

Er péh e gredam, Tad Santél, diarbenn ho kloér,
e gredam eùé heb diforh erbed, a gaos d'ho komzeu,
a-zivoud ho Mab, a-zivoud er Spered Glan.

Hag èlsé, én ur zisklériein on fé
én un Doué gwirion ha peurbaduz,
éh adoram ar un dro en tri Person
en-des en héveleb gelloud,
en héveleb splandér.

Aveid ho meulein é kan en Eled hag en Arhéled
hag oll Spereudu gelloudeg en Néan,
unânet o bouéhieu eid lared de virùikén :

SANTEL, SANTEL, SANTEL...

PREFAS KALON SAKRET JEZUZ

E GWIRIONE, Tad Santél, Doué oll-gelloudeg ha

/peurbaduz,

un dra just ha deliet é ho trugèrékad
é peb léh hag é peb amzér.

HUI hag e hues vennet

ma vehé toullet ged lans er soudard
kosté ho Mab staget doh er Groéz,
ha ma vehé digoret é galon,
mammenn sakret a vadeleh on Doué,
aveid lezel de rideg arnom
houlenneu a hrès hag a bardon.

Hag èl ma oé er galon-sé intânet a viskoah
ged er vrasan karanté én on hevér,
éma deit de voud ur léh a zichuéh,
aveid en inéaneu santél,
hag aveid er béherion glaharet ur porh a salvedigeh.

RAG-SE, unânet ged en Eled hag en Arhéled
ha ged oll Spereudu gelloudeg en Néan,
é Kânam mélasion d'ho kloér én ul lared de virùikén :

SANTEL, SANTEL, SANTEL...

PREFAS ER HRIST ROUE

En Aotrou Doué revo genoh

R/ Ha ged ho spered

Saùam on haloneu

R/ Saùet int trema Doué

Meulam Doué on Aotrou

R/ Just ha santél é

E GWIRIONE, Tad Santél, Doué oll-gelloudeg ha

/peurbaduz,

un dra just ha deliet é ho trugèrékad
é peb léh hag é peb amzér,

HUI hag e hues sakret Béleg peurbaduz ha Roué er bed
ho Mab ungânet, Jézuz Krist on Aotrou,
eid ma hellehé en em gennig ar aotér er Groéz,
provadenn divlamm ha peahuz,
aveid salvedigeh en dud ;
ha ma hellehé eùé,
goudé boud pléget en oll dreu krouéet édan é vestroni,
lakad étre ho teuorn, Doué a oll vrasted,
ur rouanteleh peurbaduz :
rouanteleh er Wirioné hag er Santeleh,
rouanteleh er Justis, er Peah, er Garanté.

RAG-SE, unânet ged en Eled hag en Arhéled
ha ged oll Speredeu gelloudeg en Néân,
é Kânam mélasion d'ho kloér én ul lared de virùikén :

SANTEL, SANTEL, SANTEL...

PREFAS SANT JOJEB

E GWIRIONE, Tad Santél, Doué oll-gelloudeg ha

/peurbaduz,

un dra just ha deliet é ho trugèrékad
é peb léh hag é peb amzér,

HAG hiziù, pe lidam gouil Sant Jojeb,
é fall deom brudein ho kloér
ha kênein deoh peb mélasion (1).

Rag éan é en dén just

e hues reit èl pried d'er Werhiéz Mamm de Zoué,
éan é er servitour fur ha fidél
e hues lakeit é penn en tiegeh santél,
aveid boud tad magér ho Mab ungânet,
konseùet dré gelloud er Spered Glan,
Jézuz Krist on Salvér.

DREZON, Tad Santél, éh oh meulet ged en Eled,
inouret ged en Arhéled,
adoret ged oll Speredeu gelloudeg en Néân
e stoui diragzoh ér vrasan leùiné.
Geté enta lesket-ni de seùel on bouéhieu
aveid ho pennigein ha kênein d'ho kloér peb

/mélasion :

SANTEL, SANTEL, SANTEL...

(1) Pe ne dé ket dé er gouil :

HAG én overenn-man én inour de Sant Jojeb
é fall deom brudein ho kloér
ha kênein deoh peb mélasion.

PREFAS ER WERHIEZ VARI

En Aotrou Doué revo genoh

R/ Ha ged ho spered

Saùam on haloneu

R/ Saùet int trema Doué

Meulam Doué on Aotrou

R/ Just ha santél é

E GWIRIONE, Tad Santél, Doué oll-gelloudeg ha
/peurbaduz,
un dra just ha deliet é ho trugèrékad
é peb léh hag é peb amzér,

HAG HIZIU, pe inouram en Intron Varia berped gwerhiéz,
é fall deom brudein ho kloér
ha kênein deoh peb mélasion.

Rag hi en-des conseùet ho Mab
dré gelloud er Spered Santél,
hag én ur chom gwerhiéz berped
hé-des reit d'er bed er sklerdér peurbaduz,
Jézuz Krist on Salvér.

DREZON, Tad Santél, éh oh meulet ged en Eled,
inouret ged en Arhéled,
adoret ged oll Speredeu gelloudeg en Néanv,
e stoui diragzoh ér vrasan leùiné.
Geté enta lesket-ni de seùel on bouéhieu
aveid ho pennigein ha kênein d'ho kloér peb
/mélasion :

SANTEL, SANTEL, SANTEL...

ANNUNCIATIO

HAG HIZIU,

pe inouram doéré mad en El d'en Intron Varia berped
/gwerhiéz

VISITATIO

HAG HIZIU

pe inouram gwéladenn en Intron berped gwerhiéz
de Santéz Elizabed...

ASSUMPTIO

HAG HIZIU, pe lidam en dé ma oé douget d'en Néan,
korv hag iné, en Intron Varia berped gwerhiéz...

NATIVITAS

HAG HIZIU, pe inouram gânedigeh en Intron Varia berped
/gwerhiéz...

PRESENTATIO

HAG HIZIU,

pe inouram en Intron Varia berped gwerhiéz kenniget
/én tampl...

IMMACULATA CONCEPTIO

HAG HIZIU,

pe inouram en Intron Varia berped gwerhiéz krouéet
/divlamm...

TRANSFIXIO

HAG HIZIU,

pe inouram seih glahar en Intron Varia berped
/gwerhiéz...

FESTIVITAS

HAG HIZIU, pe lidam er gouil-man

én inour d'en Intron Varia berped gwerhiéz...

VENERATIO

HAG HIZIU,

pe inouram en Intron Varia berped gwerhiéz...

IN MISSIS VOTIVIS

HAG EN OVERENN-MAN én inour d'en Intron Varia
/berped gwerhiéz...

PREFAS SANTEZ ANNA

En Aotrou Doué revo genoh

R/ Ha ged ho spered

Saùam on haloneu

R/ Saùet int trema Doué

Meulam Doué on Aotrou

R/ Just ha santél é

E GWIRIONE, Tad Santél, Doué oll-gelloudeg ha
/peurbaduz,
un dra just ha deliet é ho trugèrékad
é peb léh hag é peb amzér,

HUI hag e hues inouret Santéz Anna
én ur rein dehi er hrès de voud ur vamm dispar.
Rag anehi éma gânnet, glan ha divlamm,
er Werhiéz Vari, Mamm de Jézuz Krist on Salvér.

Hui hag e hues hi reit eùé èl Patronéz
de bobl fidél er Vretoned,
eid ma kavehent berped sekour ha gouarnasion
ged Mamm-goh ho Mab karet.

RAG-SE, unânet ged en Eled hag en Arhéled
ha ged oll Speredeu gelloudeg en Néân,
é Kânam mélasion d'ho kloér én ul lared de virùikén :

SANTEL, SANTEL, SANTEL...

PREFAS SANT YEHANN ER BADEOUR

E GWIRIONE, Tad Santél, Doué oll-gelloudeg ha
/peurbaduz,
un dra just ha deliet é ho trugèrékad
é peb léh é peb amzér.

HAG HIZIU é fall deom brudein en treu kaer
e hues groeit é kevér Sant Yehann er Badéour,
profed er Mèsi de zoned :
Eraog boud gânnet,
éan en-des anaùet bouéh Mari,
Mamm er Hrist on Aotrou,
hag é saill ged er joé étré digosté Elisabed,
en-des reit dehi de houied
éh oé arriù Salvédigeh er bed.

Ean hag en-des, pe oé conseùet, digaset inour d'é Vamm,
en-des eùé, pe oé gânnet, reit éndro d'é dad
er gomz eit ho meulein.

Ean hebkén é er profed
en-des predéget donedigeh er Salvér
hag ar un dro en diskoeit d'er bed.

Eid rein d'en deur gelloud de santéllad,
éan en-des badéet é stér er Jourdén
en hani e zelié rein deom er wir vadéent,
Jézuz Krist on Salvér.

RAG-SE, unânet ged en Eled hag en Arhéled
ha ged oll Speredeu gelloudeg en Néân,
é Kânam mélasion d'ho kloér én ul lared de virùikén :

SANTEL, SANTEL, SANTEL...

PREFAS SANT PADERN, DIAZEOUR ILIZ GWENED

En Aotrou Doué revo genoh

R/ Ha ged ho spered

Saùam on haloneu

R/ Saùet int trema Doué

Meulam Doué on Aotrou

R/ Just ha santél é

E GWIRIONE, Tad Santél, Doué oll-gelloudeg ha
/peurbaduz,

un dra just ha deliet é ho trugérèkad
é peb léh hag é peb amzér.

RAG m'en-des plijet deoh én ho trué
on galùein ag en tioélded d'er sklerdér,
on tennin a sklavaj er péhed
eid gobér ahanom ho pugalé.

En ho madeleh, Aotrou Doué,
e hues hadet én or bro er fé kristen,
dré labour ha poénieu Sant Padern on Patron,
hag hé lakeit e hues de zoug fréh énnom
dré é vériteu.

Ha breman, Tad Santél,
sonneit er péh e hues groeit énnom,
ha diwallet dré ho kelloud en deved e hues dastumet
ha reit d'ho Mab.

Plijet genoh o santéllad én ho kwirioné,
o unânein muioh-mui dré nerh ho karanté
hag o dégemér é gloér er Baradouiz,
dré Jézuz Krist on Salvér.

DREZON, Tad Santél, éh oh meulet ged en Eled,
inouret ged en Arhéled,
adoret ged oll Speredeu gelloudeg en Néanv
e stoui diragzoh ér vrasan leuiné.

Geté enta lesket-ni de seùel on bouéhieu
aveid ho pennigein ha kênein d'ho kloér peb

/mélasion :

SANTEL, SANTEL, SANTEL...

— 30 —

PREFAS EN OLL SENT

E GWIRIONE, Tad Santél, Doué oll-gelloudeg ha
/peurbaduz,
un dra just ha deliet é ho trugérèkad
é peb léh hag é peb amzér.

HUI hag e zo meulet ged er Sent tolpet én dro deoh,
rag éh inourein o mériteu é kouronet ho tonézoueu.

Hui hag e ra deom dré o buhé ur skuir-vad de heuli,
dré o fedenn aveidom un harp hag ur sekour,
dré er gomunion geté ur lod én o leuiné.

Ha ni, kalonekeit ged testeu ken nivéruz é selled dohem,
reveem nerhuz de boénein betag er penn,
aveid gounid èlté
er gouronenn ne zivleuo birükén,
dré Jézuz Krist on Salvér.

DREZON, Tad Santél, éh oh meulet ged en Eled,
inouret ged en Arhéled,
adoret ged oll Speredeu gelloudeg en Néan
e stoui diragzoh ér vrasan leuiné.
Geté enta lesket-ni de seùel on bouéhieu
aveid ho pennigein ha kênein d'ho kloér peb
/mélasion :

SANTEL, SANTEL, SANTEL...

— 31 —

PREFAS GLOESTR EN ILIZIEU

E GWIRIONE, Tad Santél, Doué oll-gelloudeg ha
un dra just ha deliet é ho trugérèkad /peurbaduz,
é peb léh hag é peb amzér.

RAG én ti-man a bedenn, saùet én inour d'ho kloér,
é plij deoh chom genem
aveid skuill arnom ho krès madelehuz,
ha derhel de santéllad en Iliz e hues Hui diazéet.

Honnéh é gwir Iliz er bedenn,
e zo ilizieu en douar ur skeudenn anehi,
en tampl e chom énnon splandér ho kloér,
tron er wirioné divrell
ha demeureans er garanté peurbaduz.

Honneh é er pried dreistpar ha muian karet
en-des er Salvér gounidet diar briz é hoèd,
hag e reseu buhé geton dré nerh er Spered Santél.

Honneh é er vamm en-des reit deom buhé er hrès,
e ra d'hé bugalé Leah er Wirioné d'o magein,
er bara a Vuhé d'o hriüad,
komzeu er pardon d'o honfortein.

RAG-SE, unânet ged en Eled hag en Arhéled
ha ged oll Speredeu gelloudeg en Néân,
é Kânam mélasion d'ho kloér én ul lared de virùikén :

SANTEL, SANTEL, SANTEL...

PREFAS EN APOSTOLED

En Aotrou Doué revo genoh
R/ Ha ged ho spered
Saùam on haloneu
R/ Saùet int trema Doué
Meulam Doué on Aotrou
R/ Just ha santél é

E GWIRIONE, Tad Santél, Doué oll-gelloudeg ha
un dra just ha deliet é ho trugérèkad /peurbaduz,
é peb léh hag é peb amzér.

HA HUI, Aotrou Krist,
ho pedein e hram de cheleu on goulenn :

Ne zilézet ket ho teved, bugul mad ha fidél,
med dré ho Apostoled béet dalhmad doh o diùenn.

Miret berped é penn ho Iliz
er ré e hues karget de genderhel ho labour
ha de voud ar ho lerh bugulion gwirion ha santél.

RAG-SE, unânet ged en Eled hag en Arhéled
ha ged oll Speredeu gelloudeg en Néân,
é Kânam mélasion d'ho kloér én ul lared de virùikén :

SANTEL, SANTEL, SANTEL...

PREFAS ER RE VARU

En Aotrou Doué revo genoh

R/ Ha ged ho spered

Saùam on haloneu

R/ Saùet int trema Doué

Meulam Doué on Aotrou

R/ Just ha santél é

E GWIRIONE, Tad Santél, Doué oll-gelloudeg ha

/peurbaduz,

un dra just ha deliet é ho trugèrékad
é peb léh hag é peb amzér,
dré Jézuz Krist on Salvér.

RAG drézon é splann diragzom

en espérans de seùel un dé a varù de viù.

Ha deusto ma dom glaharet

é chonjal éma deli deom merùel,

éh om konfortet ged promes er vuhé divarùél.

Rag aveid ho tud fidél, Aotrou Doué,

nen dé ket kollet er vuhé,

med troeit hebkén én ur vuhé kaerroh.

A pe vo dismantret demeureans on inéan ar en douar,

é vo reit dem unan peurbaduz ér Baradouiz.

RAG-SE, unânet ged en Eled hag en Arhéled

ha ged oll Speredeu gelloudeg en Néân,

é Kânam mélasion d'ho kloér én ul lared de virùikén :

SANTEL, SANTEL, SANTEL...

Pedenn-Veur I

Tad lan a vadeleh, ho pédein e hram a greiz kalon
dré Jézuz Krist ho Mab hag on Aotrou,
ha drézon é houlennam genoh dégemér ha bennigein
er proveu-man, er sakrifis glan ha santél.

Er hennig e hram deoh de getan aveid ho lliz santél

/katolig,

ma plijo genoh hé diwall (goarantein) ha rein dehi er

/peah,

hé unânein hag hé rén dré er bed abéh,

a-unan ged on Tad santél er Pab...

on Eskob...

ha kement hani en-des karg de vired (houarn) er gwir
fé katolig deit ag en Apostoled.

HO-PET CHONJ, Aotrou Doué,

ag ho serviterion (ha servitourézed)....

ag er ré e zo aman én dro dem,

e anaùet o fé hag o haranté.

Aveité é kennigam, hag ind eué e gennig deoh

er sakrifis-man a vélasion

aveité hag o zud,

aveid o salvedigeh,

aveid o yéhed a gorv hag a inéan ;

devadoh é saùant o fédenneu,

Doué peurbaduz, biù ha gwirion.

UNANET ged en Iliz abéh, é fall deom inouerein
de getan en Intron Varia, berped Gwerhiéz,
Mamm de Jézuz Krist, on Doué hag on Aotrou,
Sant Joheb hé fried,
en Apostoled santél Pier ha Paol,
Andrèu, Jak ha Yehann, Tomaz, Jak ha Filip,
Bartolomé ha Maheu, Simon ha Tadé ;
Er Vartired : Lin, Klet, Klémans,
Sist, Kornéli, ha Siprian,
Lorans, Krizogon, Yehann ha Paol,
Kosman ha Damian hag en oll Sent.
Dré o mériteu hag o fédenneu,
ni ho péd d'on sekour ha d'on goarantein berped,
dré on Salvér Jézuz Krist. Amen.

CHETU ENTA er brovadenn e gennigam deoh,
ni, ho péliéon, ha genem ho tud fidél :
dégeméret-hi ged madeleh, Aotrou Doué,
eid ma viùeem én ho peah ér bed-man,
hag é léh boud dânet de virvikén,
ma veem merchet émesk er ré salvet,
dré on Salvér Jézuz Krist. Amen

Er béleg e astenn é zeuorn dreist er proveu :

PLIJET GENOH, Aotrou Doué, dré nerh ho pennoh,
santéllad er brovadenn-man,
ma vo é stad de blijein deoh,
ha ma tei de voud aveidom

Korv **†** ha Goèd ho Mab karet,
Jézuz Krist on Aotrou.

D'EN NOZ éraog é basion,
Jézuz e gemér bara én é zeuorn santél,
hag é zeulagad saüet trema en néanv
devadoh-hui, Doué é Dad oll-gelloudeg,
én ur rantein deoh gloér ha trugèré,
é vennig ha é torr er bara étre é zisiplad én ur lared :

**Keméret oll ha débret,
rag kement-man zo me horv
lakeit d'er marù aveidoh.**

ELSE HOAH goudé koén,
é kemér er halis présiuz-man étre é zeuorn santél,
hag én ur rantein deoh gloér ha trugèré,
er bennig hag er ra d'é zisiplad én ur lared :

**Keméret oll hag ivet,
rag hennen e zo Kalis men Goèd,
Goèd en emgleu neùe ha peurbaduz
Skuillet aveidoh hag aveid en dud
eid pardon er pehedeu.
Groeit kement-man aveid lidein er chonj ahanon.**

Er Béleg :

(Breudér kristen) CHETU aman mistér er Fé

Kan er bobl

Ar don E GROH EN ANGONI Nn 95

Salvér Jézuz, lidein e hram ho Marù Santél
Brudein e hram ged joé ho Adsaù ag er bé
én ur hortoz Dé ho tistro a lein en Né.

CHETU PERAG, ged er chonj a Jézuz Krist

ho Mab hag On Aotrou,
en-des gouzanvet (anduret) é Basion,
e zo deit a varù de viù
ha ged gloér saùet d'en néan,
ni, ho péliéon, ha genem ho pobl santél,
ni e gennig deoh, Doué a oll vrasted,
diar ho tonézoneu,
er sakrifis divlamm, er sakrifis santél,
bara sakret er vuhé peurbaduz
ha kalisad er salvedigeh.

TAOLET ARNEHE, ni ho péd, ur sell a garanté,

hag, èl m'ho-pes dégeméret mad
proveu ho servitour Abel, en dén just,
sakrifis Abraham on Tad,
hag hani Melkisédeg, ho péleg meur,
dégeméret aman er Sakrifis santél,
er brovadenn divlamm.

A GALON IZEL ho pédam, Doué oll-gelloudeg :

groeit ma vo douget on provadenn dré ho El santél
ar aotér ho kloér é lein en néan,
diragzoh-hui, Doué a oll vrasted,
aveid ma tichenno peb grès ha peb bennoh
arnom-ni oll e geméro diar en aotér-man
Korv ha Goéd ho Mab on Salvér Jézuz Krist.
Amen.

HO-PET CHONJ eùé, Aotrou Doué,
ag ho serviterion (ha servitourézed)...
treménet én on raog, merchet ged siell er Fé,
hag e zo breman kousket ér peah.

Reit dehé, ni ho péd,
ha d'en oll inéâneu e renoz én Aotrou Krist,
sklerdér, peah ha leuiné ho paradouiz. Amen.

HA DEOM-NI eùé, péherion,
lan a fianc én ho madeleh,
reit er hrès de voud lodeg é eurusted
ho Apostoled ha Martired santél,
Yehann er Badéour, Stevan, Maheuaz ha Barnabé,
Ignas, Aleksandr, Marsellin ha Piér,
Félisité, Perpétu, Agat, Lusi,
Agnès, Sésil, Anastazi hag en oll Sent.
Aveid on dégemér én o mesk,
ne sellet ket doh talvoudegeh on obéreu
met doh larganté ho madeleh,
dré on Salvér Jézuz Krist.

Er béleg e joent é zeuorn

DREZON berped é krouéet en oll vadeu-man,
é laket énné santeleh, buhé ha bennoh,
aveid o rein deom é donézon.

**Dré ho Mab, geton hag énnon
deoh-hui, Doué en Tad oll-gelloudeg
a-unan ged er Spered Santél,
peb gloér ha peb inour
a oll viskoah da virùikén.**

R/ Amen.



men doué, m' ho kar ged oll nerh me halon
 adreist kement tra' zo. me gar eùé, abalamor d'oh,
 oll an dud' zo àr an douar, ha de gentan, me breudér
 ar vretoned, ar ré izéllan dreistoll, revé gourhemenn
 ho mab, jéruz krist, on salvér. amen.

Pedenn-Veur II

En Aotrou Doué revo genoh
 R/ Ha ged ho spered
 Saùam on haloneu
 R/ Saùet int trema Doué
 Meulam Doué on Aotrou
 R/ Just ha santél é

DELIET-MAD ha santél, just-meurbed ha salvuz é
 ho trugèrékad é peb léh hag é peb amzér,
 Hui Tad santél, dré Jéruz Krist ho Mab karet.
 Ean é ho Furneh peurbaduz
 e hues drézon krouéet peb tra.
 Ean e hues kaset dem
 aveid on dasprénein hag on salvein.
 Deit é de voud dén dré gelloud er Spered Glan,
 ha gânéet é bet ag er Werhiéz Vari.
 Dré ma fallé dehon gobér penn d'er benn ho volanté,
 ha gounid deoh ur bobl santél,
 éan en-des astennet é zivréh ar er groéz
 aveid distruj er marù,
 ha lakad de splannein en Adsaù d'er Vuhé.
 Rag-sé ged en Eled hag en oll Sent
 é vrudam brasted ho kloér
 én ur gânéin oll a-unan ho meuleudi (mélasion) :

Santél, Santél, Santél en Aotrou Doué, Mestr er bed.
Lan é ged ho kloér en néanv hag en douar.
Hosanna é lein en Néanv !
Revo benniget en hani e za é anù en Aotrou Doué.
Hosanna é lein en Néanv !

YA, SANTEL OH é gwirioné, Aotrou Doué,
ha Hui é mammenn peb santeleh.

Er béleg e astenn é zeorn dreist er proveu
Plijet genoh enta santéllad ged nerh ho Spered Glan
er proveu-man kenniget deoh,
hag e hra sin er groéz arnehé
ma teint de voud aveidom

Korv † ha Goèd On Salvér Jézuz Krist.

D'EN eur ma dé gwerhet
ha m'en-em ra d'é Basion ag é vad volanté,
Jézuz e gemér bara,
hag, én ur rantein deoh gloér ha trugèré,
en torr étré é zisiplé én ur lared :
Keméret oll ha débret,
rag kement-man zo me horv
lakeit d'er marù aveidoh.

ELSE hoah goudé koén é kemér er halis,
hag én ur rantein deoh gloér ha trugèré,
er ra d'é zisiplé én ur lared :
Keméret oll hag ivet,
rag hennen e zo Kalis men Goèd,
Goèd en emgleu neùé ha peurbaduz
Skuillet aveidoh hag aveid en dud
eid pardon er pehedeu.
Groeit kement-man aveid lidein er chonj ahanon.

Goudé Saù Korv Doué

Er Béleg :
Chetu aman mistér er Fé.

Er Bobl :
Revo meulet Jézuz on Doué
en-des eidom reit é vuhé : revo meulet !

Revo meulet ged leùiné
Jézuz saùet biù ag er bé : revo meulet !
Revo meulet Jézuz Salvér
e zeï éndro kreiz é splandér : revo meulet !

E TERHEL chonj enta a varù Jézuz, ag é adsaù ag er bé,
é kennigam deoh, Tad Santél,
bara er vuhé ha kalisad er salvedigeh
en ur lared deoh trugèré
eid er hrès e ret deom d'en em gavouid dirazoh aveid
/ho chervijein.

A GALON IZEL ho pédam :
ni hag e geméro lod é Korv ha Goèd On Salvér,
lakeit-ni de voud unânet oll dré nerh er Spéred Santél.

HO-PET CHONJ, Aotrou Doué,
ag ho liz strèuet dré er bed abéh :
groeit ma talho de greskein én ho karanté,
a-unan ged on Tad santél er Pab...
on Aotrou Eskob...,
ha kement hani en-des karg ag ho pobl.

..... E overenneu er ré varù é hellér lared :

HO-PET CHONJ ag ho servitour (éz)...,
e hues galüet ag er bed-man devadoh.
Pen dé bet badéet é marù Jézuz,
ha p'en-des (hé-des) a-unan geton gouzanvet
/(anduret) pasion,
reit eùé dehon (dehi) boud lodeg é Adsaù ho Mab d'er
/Vuhé.

HO-PET CHONJ eùé ag on breudér
e zo marù ged en espérans de seùel lan a vuhé,
hag a oll en dud treménet.
Dégeméret-ind én ho Paradouiz de wéled ho
/splanddér.

PLIJET genoh kemér truhé dohem,
ma helleem boud lodeg ér vuhé peurbaduz,
ged er Werhiéz gloriuz Vari, Mamm de Zoué,
ged en Apostoled hag en oll Sent
en-des biüet én ho karanté.
A-unan geté, lakeit-ni de gânein de virùikén
ho kloér hag ho meuleudi (mélasion), dré Jézuz Krist
/on Salvér.

Er béleg e joent é zeuorn.

**Dré ho Mab, geton hag énon
deoh-hui, Doué en Tad oll-gelloudeg
a-unan ged er Spered Santél,
peb gloér ha peb inour
a oll viskoah da virùikén.**

R/ Amen.

Pedenn-Veur III

SANTEL oh-hui, Aotrou Doué,
ha deliet é de gement tra e hues krouéet
kânein deoh meuleudi (mélasion),
rag, dré ho Mab, On Salvér Jézuz Krist,
ha dré nerh er Spered Glan,
é ret de beb tra buhé ha santeleh,
hag é talhet de zastum a beb tu ur bobl e vo ho hani,
ur bobl e gennigo d'ho anù santél dré er bed abéh
ur brovadenn divlamm.

Er béleg e astenn é zeuorn dreist er proveu.

A GALON IZEL é houlennam enta genoh, Aotrou Doué,
ma vo sakret ha santéleith ged ho Spered Glan
er proveu-man on-es dégaset deoh,

hag e hra sin er groéz arnehé.

eid ma teint de voud Korv † ha Goèd ho Mab,
On Salvér Jézuz Krist,
Ean hag en-des gourhemennet deom
lidein er sakrifis-man.

EN NOZ men dé gwerhet, Jézuz e gemér bara,
hag én ur rantein deoh gloér ha trugèré,
er bennig, en torr étré é zisipléd én ur lared :

**Keméret oll ha dèbret,
rag kement-man zo me horv
lakeit d'er marù aveidoh.**

ELSE HOAH, goudé koén, é kemér er halis,
hag én ur rantein deoh gloér ha trugèré,
er bennig hag er ra d'é zisipléd én ur lared :

**Keméret oll hag ivet,
rag hennen e zo Kalis men Goèd,
Goèd en emgleu neùé ha peurbaduz
Skuillet aveidoh hag aveid en dud
eid pardon er pehedeu.
Groeit kement-man aveid lidein er chonj ahanon.**

Goudé Saù Korv Doué

- Er Béleg :
Breudér, kanam ihuél mistér heb par er Fé !

Er Bobl :

Lidein e hram ho marù santél, Salvér Jézuz ;
Inour e ganam d'oh saùet biù ag er bé ;
Gortoz e hram bamdé ho tistro gloriuz

- Er Béleg :
Chetu aman mistér er Fé.

Er Bobl :

Revo meulet Jézuz on Doué
en-des eidom reit é vuhé : revo meulet !
Revo meulet ged leùiné
Jézuz saùet biù ag er bé : revo meulet !
Revo meulet Jézuz Salvér
e zeï éndro kreiz é splanndér : revo meulet !

E TERHEL CHONJ enta, Aotrou Doué,
ag ho Mab en-des gouzanvet (anduret)
é Basion aveid on salvedigeh,
e zo deit a varù de viù,
ha ged gloér saùet d'en Néan,
én ur hortoz eùé ma tei éndro é fin er bed,
é kennigam deoh aveid ho trugèrékad
er sakrifis-man biù ha santél.

TAOLET, ni ho péd, ho sell madelehuz
ar brovadenn ho Iliz,
aveid anaouid énni sakrifis ho Mab
en-des reit deom éndro ho pardon.
A pe veem bet maget ged Korv ha Goèd On Salvér,
reit deom er hrès ae voud lânet ged er Spered Santél.
eid ne hreem mui
nameid ur horv hag ur spered hebkén
é Jézuz Krist On Aotrou.

REBLIJO geton rein deom santeleh,
ma helleem-ni eùé boud ur brovadenn peurbaduz,
ha kaouid lod é eurusted er baradouiz,
ged er Werhiéz gloriuz Vari, Mamm de Zoué,
en Apostoled hag er Vartired santél, Sant...,
hag en oll Sent e zalh de bédein diragzoh aveidom.
Groeit eùé, ni ho péd, Aotrou Doué,
ma talvo er sakrifis-man,
sakrifis er pardon hag en Emgleu neùé,
de zegas d'er bed abéh peah ha salvedigeh.

KRIUEIT fé ha karanté ho lliz
hed hé ferhinded ar en douar.
Reit nerh d'ho servitour on Tad santél er Pab...
on Eskob..., en oll eskobed ha béléion.
Sekouret er bobl abéh e hues dibabet aveidoh ;
ho tud fidél tolpet diragzoh eid ho servijein :
cheleuet o fédenneu ha chomet geté d'o gouarantein ;
ho pugalé dispartiet a beb tu :
galùet ind devadoh, Tad madelehuz,
ma veint dastumet én ho pobl.

Aveid overenneu er ré varù, gwélet izéllah

ON BREUDER TREMENET ha kement dén just
en-des huiteit er bed-man :
plijet genoh rein dehé
un dégemér mad én ho rouanteleh ;
éno eùé on-es en espérans
de viùein geté unânet oll de virùikén,
ha de voud goalhet ged splandér ho kloér,

Er béleg e joent é zeuorn.

dré On Salvér Jézuz Krist,
rag drézon é skuillet ar er bed
en oll vadeu ged larganté.

**Dré ho Mab, geton hag énon
deoh-hui, Doué en Tad oll-gelloudeg
a-unan ged er Spered Santél,
peb gloér ha peb inour
a oll viskoah da virùikén.**

R/ Amen.

Aveid overenn er ré varù :

HO-PET CHONJ ag ho servitour (éz)...
e hues galùet (hiziù) ag er bed-man devadoh :
Pe dé bet badéet é marù Jézuz,
ha p'en-des (p'hé-des) a-unan geton gouzanvet pasion
reit dehon (dehi) boud lodeg eùé
é Adsaù ho Mab d'er Vuhé,
en dé-sé ma tei on horveu distér
de voud haval doh é Gorv gloriuz,
pe vo galùet er ré varù de seùel ag en douar.

HA PLIJET GENOH én ho madeleh
rein d'on breudér treménet,
ha de gement dén just en-des kuiteit er bed-man,
un dégemér mad én ho rouanteleh ;
éno eùé on-es en espérans
de viùein geté unânet oll de virùikén,
ha de voud goalhet ged splandér ho kloér.
Hui e sého neuzé en dareu ag on daoulagad,
rag dré ho kwéled èl ma oh, Hui on Doué,
é teem de voud haval dohoh,
hag é talheem d'Ho meulein de virùikén,

Er béleg e joent é zeuorn.

dré On Salvér Jézuz Krist,
rag drézon é skuillet ar er bed
en oll vadeu ged larganté.

**Dré ho Mab, geton hag énon
deoh-hui, Doué en Tad oll-gelloudeg
a-unan ged er Spered Santél,
peb gloér ha peb inour
a oll viskoah da virùikén.**

R/ Amen.

Pedenn-Veur IV

En Aotrou Doué revo genoh,

R/ Ha ged ho spered,

Saùam on haloneu,

R/ Saùet int trema Doué.

Meulam Doué on Aotrou,

R/ Just ha santél é.

DELIET-MAD é ho trugèrékad, Tad Santél,
just-meurbed ha salvuz ho meulein,
rag Hui hebkén e zo Doué, en Doué biù ha gwirion
e zo a oll viskoah, e vo de virùikén
sklerdér adreist spered mabdén.

Hui é Doué er vadeleh ha mammenn peb buhé ;
groeit e hues en oll dreu
eid o lânein ged ho pennoh,
ha rein leùiné de éleih anehé
ged splandér ho kloér.

Rag-sé en em zalh diragzoh rummadeu dinivér en Eled
aveid ho chervijein dé ha noz ;
ha lan a joé é wéled ho splandér,
ne arsaùant a Ho meulein.

A-unan geté é fall deom eùé kênein deoh,
ha lakad dré on bouéh er bed abéh
de vrudein ged leùiné ho meuleudi (mélasion) :

Santél, Santél, Santél en Aotrou Doué, Mestr er bed.
Lan é ged ho kloér en néan hag en douar :
Hosanna é lein en néan.
Revo benniget en hani e za é anù en Aotrou Doué
Hosanna é lein en Néan.

HO MEULEIN E HRAM, Tad Santél,
abalamor d'ho kelloud heb par,
dré ma hues groeit peb tra ged furneh ha karanté :
Krouéet e hues mab-dén haval dohoh,
ha reit karg dehon de rénein er bed abéh,
aveid m'en-dehé gelllet, dré ho chervijein,
Hui hebkén é Grouéour,
boud mestr ar en oll grouéedeleh.

Goudé m'en-des mabdén, é tisentein dohoh,
kollet ho karanté,
ne hues ket éan dilézet édan gelloud er Marù :
én ho madeleh éh oh deit de sekour en oll,
eid ma hellehent ho klask hag ha kavouid éndro.

Liéz a wéh e hues groeit Emgleu ged en dud,
hag o disket dré er Brofétéd,
én ur hortoz er salvedigeh.

Karet e hues kement er bed, Tad santél,
ma hues kaset dehon d'er salvein,
pe oé arriù en amzér merchet
ho Mab ungânet.

Keméret en-des on natur dén
dré nerh er Spered Santél
ha gânét é bet ag er Werhiéz Vari ;
biùet en-des on buhé-ni,
haval dohem é peb tra nameid er péhed.

Doéré mad er salvedigeh en-des dégaset d'er ré beur,
er frankiz d'er ré dalhet ér sklavaj,
er leùiné d'er ré glaharet o haloneu.

Aveid kas de benn ho volanté madelehuz,
en-des en em reit d'er marù.
Met, éh adseùel ag er bé,
en-des diskaret er marù ha reit deom éndro er Vuhé.

Hag eid ne viùehem ket mui aveidom on-unan,
med aveiton-éan, marù hag adsaùet,
en-des kaset ag ho perh, Tad Santél,
èl donézon ketan d'er ré e gred,
er Spered Glan de beurachiù é labour ér bed,
én ur santéllad peb tra.

Er béleg e astenn é zeuorn dreist er proveu,

CHETU BREMAN on pédenn, Aotrou Doué :
reblijo ged ho Spered Glan santéllad er proveu-man,

hag e hra sin er groéz arnehé.

aveid ma teint de voud

Korv **†** ha Goèd On Salvér Jézuz Krist,
ha ma helleem lidein er mistér braz
en-des Jézuz reit deom
èl sakrifis en Emgleu peurbaduz.

PE OE DEIT EN EUR aveiton de reseu gloér genoh, Tad
/Santél,
èl m'en doé karet er ré e oé dehon ér bed-man,
Jézuz o haras tré betag er penn.

Hag épad er Goén devéhan é kemér bara,
er bennig hag en torr étré é zisipléd én ur lared :

**Keméret oll ha dèbret,
rag kement-man zo me horv
lakeit d'er marù aveidoh.**

ELSE hoah é kemér er halis lan a win,
hag én ur rantein deoh gloér ha trugèré,
er ra d'é zisipléd én ur lared :

**Keméret oll hag ivet,
rag hennen e zo Kalis men Goèd,
Goèd en emgleu neùé ha peurbaduz
Skuillet aveidoh hag aveid en dud
eid pardon er pehedeu.
Groeit kement-man aveid lidein er chonj ahanon.**

ER BELEG :

(Bredér kristen) **CHETU** aman mistér er Fé.

KAN ER BOBL : ar don : E GROH EN ANGONI Nn 95

Salvér Jézuz, lidein e hram ho marù santél
Brudein e hram ged joé ho Adsaù ag er bé
én ur hortoz dé ho tistro a lein en Né.

CHETU PERAG, Aotrou Doué, ni eué, én ur lidein breman
mistér on salvedigeh,
é talham chonj a Jézuz marùet ha diskennet émesk
/er ré varù,

é tisklériam on fé énonn
e zo adsaùet d'er vuhé ha oeit d'en néan a zéheu deoh.
Hag én ur hortoz é zistro-ged-gloér
é kennigam deoh é Gorv hag é Hoèd,
er sakrifis nen-des nameiton e blij deoh,
hag e hell salvein er bed abèh.

TAOLET HO SELL, Aotrou Doué,
ar er brovadenn e laket étré deuorn ho lliz :
én ho madeleh, reit d'er ré
e vo lodeg ér bara hag ér gwin-man
er hrès de voud unânet
ged er Spered Glan én ur horv hebkén ;
lakeit ind de voud parfet é Jézuz Krist,
ma teint de voud ur brovadenn biù
eid ho meuleudi (mélasion) hag ho kloér.

HA BREMAN, ho-pet chonj, Aotrou Doué,
ag en oll dud e gennigam er sakrifis-man aveité :
de getan, ho servitour on Tad santél er Pab...,
on Eskob... hag oll eskobed er bed ;
en oll véléion hag er ré en-des karg én lliz,
er ré en-des goulennet en overenn-man,
er ré tolpet én dro dem,
ho pobl kristén abéh,
ha kement hani ho klask a wir galon.

Ho-pet chonj eùé ag on breudér marù é peah on Salvér,
hag a oll dud treménet
nen-des nameidoh aveid anaouid o fé.

DEOM-NI OLL, bugalé deoh,
reit er hrès, Tad madelehuz,
de voud lodeg é leùiné er baradouiz,
ged er Werhiéz gloriuz Vari, Mamm de Zoué,
ged en Apostoled hag en oll Sent,
én ho rouanteleh :
éno, ged en oll Grouéedeleh tennet a vreinadur er
péhed hag er marù, é kâneem ho kloér de virùikén,
dré on Salvér Jézuz Krist :

Er béleg e joent é zeuorn

rag drézon é skuillet ar er bed
en oll vadeu ged larganté.

**Dré ho Mab, geton hag énonn
deoh-hui, Doué en Tad oll-gelloudeg
a-unan ged er Spered Santél,
peb gloér ha peb inour
a oll viskoah da virùikén.**

R/ Amen.

Lid Er Gomunion

PATER NOSTER

El m'on-es desket ged on Salvér
ha revé é hourhemenn é kredam lared :

On Tad e zo én néanv,
ho anù revo santéleit,
ho rouanteleh degaset dem,
ho volanté revo groeit ar en douar èl én néanv.
Reit dem hiziù on bara pamdieg,
pardonet dem on ofanseu,
èl ma pardonam d'er ré en-des on ofanset,
ha n'on laosket ket de gouéh én tentasion,
med gouarantet-ni doh en droug.

GOUDE ER PATER

Plijet genoh, Aotrou Doué, pellad en droug azohem,
ha rein deom er peah ér bed-man,
eid ma veem, dré sekour ho madeleh,
distag berped doh er péhed
ha gouarantet doh peb trebill,
ni hag e horto eurusted er baradouiz
ha distro on Salvér Jézuz Krist.

R/ Deoh-hui, o Roué en Néanv hag en douar,
Gloér ha gelloud berped !

Salvér Jézuz Krist, Hui e hues laret d'ho Apostoled :
"Er peah e leskan genoh, me feah e ran deoh",
ne sellet ket doh on péhedeu, med doh fé ho lliz ;
plijet genoh, revé ho volanté,
rein dehi er peah hag hé unânein,
Hui hag e viù hag e rén a oll viskoah de virùikén.

R/ Amen.

ER BELEG :

**Revo peah en Aotrou Krist
berped én ho kalon !**

ER BOBL :

**Biùam é peah oll étrézom
ér garanté.**

A vouéh Izél :

Korv ha goèd on Salvér Jézuz Krist, keijet aman,
de rein deom, dré er gomunion, er vuhé peurbaduz.

OEN DOUE

Oén Doué, hag e lam péhed er bed, ho-pet trué dohem
Oén Doué, hag e lam péhed er bed, ho-pet trué dohem
Oén Doué, hag e lam péhed er bed, reit deom er peah

Eid er ré varù

Oén Doué, hag e lam péhed er bed, reit dehé repoz
Oén Doué, hag e lam péhed er bed, reit dehé repoz
Oén Doué, hag e lam péhed er bed, reit dehé repoz
/de virùikén.

- Salvér Jézuz Krist, Mab en Doué biù,
Hui zo deit revé volanté ho Tad
ha ged nerh er Spered Santél,
de rein dré ho marù er vuhé d'er bed ;
plijet genoh, dré ho korv hag ho koèd sakret,
men glânnad a me oll fallanté
ha men gouarn doh en droug ;
groeit ma talhein a greiz me halon
d'ho kourhemenneu,
ha n'em lesket birùikén d'en em zisparti azohoh.

- Salvér Jézuz Krist, pe yan de reseù
ho horv hag ho koèd santél,
ne sellet ket doh me féhedeu,
med kentoh, dré ho madeleh,
groeit ma talvo er gomunion-man
d'em diùenn korv hag iné,
ha de rein dein salvedigeh.

EURUS er ré e zo galùet de bred santél on Salvér.
CHETU OEN DOUE, en Hani e lam péhed er bed.

**Men Doué, ne véritan ket ma teèt ém halon
med laret ur gomz hebkén hag é vo éseit dein.**

A vouéh izél :

Korv on Salvér d'em gouarn eid er Vuhé peurbaduz.
Goèd on Salvér d'em gouarn eid er Vuhé peurbaduz.

En ur rein en hosti

KORV ER SALVER

R/ Amen.

Aveid Klozein En Overenn

PEDENN

...Dré Jézuz Krist on Salvér

R/ Amen

En Aotrou Doué revo genoh

R/ Ha ged ho spered

Doué oll-gelloudeg d'ho pennigein :

En Tad, Er Mab hag er Spered Santél

R/ Amen

Kerhet é peah on Salvér

R/ Bennoh de Zoué !



PATER NOSTER

troeit a neùé zo

**On Tad e zo én Néanv,
ho anù re-vo santéleith,
ho rouanteleh digaset dem,
ho vennanté re-vo groeit ar en douar èl én Néanv.
Reit dem hiziù on bara pamdéeg,
pardonet dem or péhedeu,
èl ma pardonam d'er ré en-des péhet dohem,
pelleit azohem luskeu er fallanté,
ha diwallet - ni doh en droug.**

PREFASEU

DIBENN-PREFAS BERREIT

(Formula brevior)

**DREZON, ged en Eled hag en oll Sent
é kanam meuleudi d'ho kloér én ur lared
de virùikén : SANTEL, SANTEL, SANTEL...**

**RAGSE, ged en Eled hag en oll Sent
é kanam meuleudi d'ho kloér én ur lared
de virùikén : SANTEL, SANTEL, SANTEL...**

SANTEL, SANTEL, SANTEL

en Aotrou Doué, Mestr er bed.

Lan é ged ho kloér en néanv hag en douar.

Hosanna é lein en Néanv !

Re-vo benniget en Hani e za é anù en Aotrou Doué.

Hosanna é lein en Néanv !


ORATIONES

DIBENN ER PEDENNEU

**... Dré Jézuz Krist, ho Mab, on Salvér hag
on Doué, e viù genoh ged er Spered Glan,
a oll viskoah de virùikén. AMEN.**

**... Hui hag e viù ged en Tad ha ged er Spered
Glan, a oll viskoah de virùikén. AMEN.**

**... Ean hag e viù genoh ha ged er Spered
Glan, a oll viskoah de virùikén. AMEN.**



mamm ha patronéz BREIZH, gouarnet ho pretoned

O MATER PATRIAE, SANCTA ANNA,
BRITONUM TUORUM SALUS ESTO !